

Sainte-Croix Quimperlé

Édifice emblématique de Quimperlé, l'abbaye de Sainte-Croix est fondée vers 1050 par Alain Canhiart, comte de Cornouaille, à la confluence de l'Ellé et de l'Isole. Son architecture est atypique et unique en Bretagne. En forme de rotonde, l'église présente un plan centré imité du Saint-Sépulcre de Jérusalem. L'effondrement de son clocher en 1862 entraîne la destruction de la plus grande partie de l'église qui sera reconstruite par Joseph Bigot dans un style néo-roman. Le chœur des moines et la crypte restent les témoins visibles du 11^e siècle.

Ouvert toute l'année

Visites guidées grand et jeune public, concerts : juillet et août
www.quimperle-communautaire.bzh

Iliz-abati Ar Groaz Santel e Kemperle

Gant Alan Kenarzh, kont Kerne e oa bet savet abati ar Groaz Santel tro 1050 e kember an Elle hag an Izol. En doare m'eo bet savet n'he deus ket he far e Breizh. Deuet eo da vezañ ur savadur arouezius eus Kemperle, e stumm ur gronnell, gant un tres kreizennet, o treveziñ hini ar Bez Santel e Jeruzalem. Fontet eo bet an tour-iliz e 1862, hag alese eo bet distrujet ul lodenn gaer eus an iliz a voe bet adsavet gant Joseph Bigot er stil nevez-roman. Gwelet a reer c'hoazh ar c'heur hag ar c'hev-iliz a chom testoù eus savadur an 11^{vet} kantved.

Digor a-hed bloaz

Gweladennoù heñchet evit an dud gour hag ar re yaouank, sonadegoù : miz Gouere ha miz Eost
www.quimperle-communautaire.bzh

Saint-Gildas- de-Rhuys

Fondée en 530 par saint-Gildas, l'abbaye adopte la Règle de saint Benoît en 818. Détruite par les Vikings, l'église est reconstruite en 1008, puis consacrée en 1032. C'est l'un des plus beaux exemples d'architecture romane en Bretagne. À voir en particulier, le transept nord, partie la plus ancienne, le rondpoint du chœur rythmé par des colonnes, le déambulatoire à chapelles rayonnantes. Les chapiteaux présentent majoritairement des variations sur le modèle corinthien. Par sa sobriété, la nef néo-classique équilibre le chœur roman, dont le chevet offre un volume très harmonieux. Ne pas manquer le trésor reliquaire.

Visites guidées

juillet et août / puis sur réservation
T 02 97 45 23 15 / 02 97 45 38 80

Iliz-abati Lokentaz

Gant sant Gweltaz e oa bet savet an abati er bloaz 530 ha degemeret e oa bet enni reolenn sant Benead e 818. Freuzet e oa bet gant ar Vikinged hag adsavet er bloaz 1008, sakret e oa bet e 1032. Unan eus kaerañ skouer an tisavouriezh roman e Breizh eo gant e golonenoù reoliek, an dro-geur gant e chapelioù tro-dro. War an togennoù e weler peurliesañ adstummoù diwar ar patrom korintiat. Dre m'eo diginkl a-walc'h an nev doare nevez-klasel e tegas ur c'hempouez d'ar c'heur roman gant stumm reoliek e benn-iliz. Na zisoñjit ket teurel ur sell ar an teñzor relegouer.

Gweladennoù heñchet

Gouere hag Eost / goude-se diwar c'houlenn
T 02 97 45 23 15 / 02 97 45 38 80

Saint-Sauveur Redon

L'abbaye est implantée sur un promontoire schisteux qui surplombe la Vilaine. Fondée au 9^e siècle, par le moine Conwoïon avec l'appui de Nominoë, Saint-Sauveur devient rapidement un des plus prestigieux monastères bénédictins de la région. À partir du 12^e siècle, des travaux d'envergure sont menés pour faire de l'abbatiale la nécropole des ducs de Bretagne. De cette époque subsiste la tour romane qui constitue un exemple d'architecture remarquable. Au temps des cathédrales, l'église se transforme pour présenter une silhouette gothique dont témoignent encore la tour occidentale, le chœur et ses chapelles.

Ouvert toute l'année

Visites guidées sur rendez-vous :
accueil@tourisme-pays-redon.com

Iliz-abati Sant Salver Redon

War ur beg-douar mein-skiltr a-us d'ar stêr Gwilen emañ an abati. En 11^{vet} kantvet e oa bet savet gant ar manac'h Konwoïon, gant skoazell ar roue Nevenoe. Buan a-walc'h e teuas Sant Salver da vezañ unan eus ar manatioù meur beneadiz ar vro. Adalek an 12^{vet} kantved e voe kaset labourioù bras en-dro evit ma teufe an iliz-abati al lec'h ma vefe beziet duged Breizh ennañ. Diwar ar mare-se e chom an tour roman a zo ur skouer heverk eus an tisavouriezh roman. Da vare an ilizoù-meur e kemm stumm an iliz evit kinnig un tres gotek aroueziet gant pezh a chom c'hoazh, an tour Gornôg, ar c'heur hag ar chapelioù.

Digor a-ed bloaz

Gweladennoù heñchet diwar c'houlenn :
accueil@tourisme-pays-redon.com

Notre-Dame en Saint-Melaine Rennes

L'église actuelle est un édifice dont les parties les plus anciennes (transept, bases de la tour du clocher) remontent à l'époque romane. C'est à Gervais, abbé de Saint-Melaine qu'en revient la reconstruction (1081 - 1109). Dans la première moitié du 13^e siècle, le carré du transept est recouvert d'une voûte d'ogives puis, au 14^e siècle, les arcades de la nef et les fenêtres hautes sont refaites ainsi que le chœur et de nombreuses baies agrandies. Cet ensemble architectural est un rare témoin de l'architecture romane présent dans une ancienne abbaye bénédictine.

Ouvert toute l'année



Visites guidées grand et jeune public : toute l'année
Concerts lors des Estivales de l'orgue : août

Iliz Itron Varia e Sant Melan e Roazhon

Lodenoù koshañ an iliz a gaver hiriv an deiz (ar groazenn, diazoù an tour) a oa bet savet er mare romanek. Adsavet e oa bet war intrudu Jelvez, abad Sant Melan (1081 - 1109). E penn-kentañ an 13^{vet} kantved e oa bet goloet kroazigell ar groazenn gant ur volz krommvegek, ha goude-se, er 14^{vet} kantved e oa bet adc'hraet gwaregoù-bolz an nev, ar c'heur hag ar prinistri. Brasaet e oa bet meur a brenestr ivez. Gant ar savadur-mañ hon eus ur skouer dibar eus an tisavouriezh romanek a c'heller gwelet en un abati beneadad gozh.

Digor a-hed bloaz / Gweladennoù heñchet evit an dud gour hag ar re yaouank : a-hed ar bloaz

Sonadegoù da geñver gouel Hañvezh an ograou e miz : Eost



ancienne
abbaye
Landévennec



Tau des abbés de Landévennec, photo : Annie Bardel / Coll. Musée de l'ancienne abbaye, acquis avec l'aide du FRAM.

EXPOSITION AN DISKOUZADEG

Sur des cendres fumantes... Heurs et malheurs d'une abbaye bretonne en l'an Mille

Landévennec, 1020. Les flammes embrasent le monastère. Les moines n'avaient pourtant pas ménagé leurs efforts pour restaurer l'abbaye endommagée par l'occupation viking. Et les catastrophes ne font que commencer... le ruisseau qui traverse le cloître déborde de son lit. Brûlée, la prestigieuse abbaye prend l'eau. Après « l'âge d'or » du 9^e siècle, l'âge « roman » est-il celui du déclin ? Enquête archéologique et récit d'une reconstruction, l'exposition porte un regard singulier, sur ce qu'a pu être « l'an mille » à la pointe de la Bretagne. Un parcours jalonné de 125 objets, rythmé par des vidéos et des dispositifs interactifs pour une visite en famille

Musée de l'ancienne abbaye de Landévennec 29570 Presqu'île de Crozon
3 juillet 2022 - 5 novembre 2023
T 02 98 27 35 90 www.musee-abbaye-landevennec.fr

« War al ludu o tivogediñ... Eur ha dizeur un abati Breizhat en 11^{vet} kantved »
Landevenneg, 1020. Paket eo ar manati gant an tan. Ar venec'h n'o doa ket damantet eus o foanioù koulskoude evit adkempenn an abati bet lakaet gwall warni keit ma oa dalc'het gant ar Vikinged. Ha ne ra ar gwalleurioù nemet kregiñ... dic'hlanñañ a ra ar wazh-dour a veze o treuziñ ar c'hloastr. Beuzet an abati a oa bet devet ! War-lerc'h « oadvezh aour » an 9^{vet} kantved, hag e vefe an oad « roman » hini an diskar ? Enklask arkeologel hag istor un adsavidigezh, setu un diskouezadeg hag a daol ur sell dic'hortoz war pezh zo bet ar « bloavezh mil » e Kornôg Breizh. Un hentenn aroueziet gant 125 objed, lusket gant videoioù ha stignadoù etre-oberiant evit plijout d'ar familhoù.

Mirdi Abati kozh Landevenneg 29570 Ledenez Kraozon
Eus an 3 a viz Gouere 2022 d'ar 5 a viz Du 2023
T 02 98 27 35 90 www.musee-abbaye-landevennec.fr

Locmaria Quimper

Située au bord de l'Odet, dans le quartier le plus ancien de Quimper, l'abbaye de Locmaria, fondation féminine, célèbre son millénaire en 2022. Très bel exemple des débuts de l'architecture romane bretonne, sa construction commence vraisemblablement par la nef, dans la 1^{re} moitié du 11^e siècle. Elle est modifiée au 16^e siècle par l'ajout d'un portail voûté d'ogives, puis par la reconstruction du chevet au 17^e s., lui-même restitué dans ses dispositions romanes au 19^e s. Le plan très régulier comporte une nef à trois vaisseaux, un transept peu saillant et un chevet échelonné.

Pardon de Locmaria : 15 août
Visites guidées et événements du millénaire : Office de Tourisme T 02 98 53 04 05

liz-abati Lokmaria Kemper

E 2022 e vo lidet milved abati Lokmaria, bet savet war vord an Oded e karter koshañ kêr Gemper evit degemer maouezed koulz ha menec'h, ha renet gant un abadez. Ur skouer vat eus deroù an tisavouriezh roman e Breizh eo, ha moarvat e oa bet loc'het gant sevel an nev da gentañ, e-doug penn-kentañ an 11^{vet} kantved. Kemmet eo bet er 16^{vet} kantved, pa oa bet ouzhpennet ur porrastell bolzet kromm, ha goude-se gant an adsevel ar penn-iliz er 17^{vet} kantved, hag adkavet e zoareoù roman en 19^{vet} kantved. Eeun-mat eo e dres, gant un nev tric'houc'h, ur groazenn n'eo ket gwall valirek, hag ur penn-iliz skeuliadet.

Pardon Lokmaria : viz Eost
Gweladennoù heñchet ha darvoudoù ar milved : Ofis an Douristelezh T 02 98 53 04 05



Saint-Tudy Loctudy

Située à l'embouchure de la rivière de Pont-l'Abbé, l'église de Loctudy a été érigée entre le 11^e et le 12^e siècles vraisemblablement à la même période que l'abbatiale Sainte-Croix de Quimperlé à qui elle emprunte, pour son déambulatoire et les chapelles axiales, le parti architectural tout en l'amplifiant puisque les décorations courent du sol jusqu'aux ouvertures. La parenté est également remarquable avec l'abbatiale de Landévennec et celle de Saint-Gildas de Rhuys. Les sources historiques ne permettent cependant pas de relier cette église à une fondation monastique.

Visites guidées : 1^{er} juillet - 31 août, mercredi et jeudi 11h
Concerts : juillet et août, mardi de l'orgue à 10H30. Toute l'année, l'association des Amis de l'orgue, inauguré en 2014, organise des rencontres musicales.
www.orgue.egliseoctudy.free.fr

Iliz Loktudi

War genou stêr Pont-n'abad emañ iliz Loktudi. Etre an 11^{vet} hag an 12^{vet} kantved e oa bet savet, d'ar c'houlz ma oa bet savet ivez iliz-abati ar Groaz Santel e Kemperle moarvat. Awenet eo bet ganti he doare tisavouriezh evit he zro-geur hag ar chapelioù tro-dro, hag aet eo pelloc'h eget he skouer zoken, p'eo bet kinklet eus al leur betek an digorou. Splann eo ivez pegen tost he doare ouzh hini iliz-abati Landevenneg hag hini Lokentaz.

Gweladennoù heñchet : 1^{añ} a viz Gouere - 31 a viz Eost, da Verc'her ha Yaou da 11eur
Sonadegoù : miz Gouere ha miz Eost, Meurzh an ograoù da 10e 1/2. A-hed ar bloaz e vez emgavioù sonerezh aozet gant ar gevredigezh Mignoned an ograoù a oa bet savet e 2014.
www.orgue.egliseoctudy.free.fr



L'opération « Abbatales romanes de Bretagne » est un projet soutenu par le Conseil régional de Bretagne.

Sites participants à l'opération

Abbatale Saint-Tudy • Ville de Loctudy & Association des Amis de l'orgue
Abbatale Notre-Dame de Locmaria • Ville de Quimper
Abbatale Sainte-Croix de Quimperlé • Ville de Quimperlé
Abbatale de Saint-Gildas-de-Rhuys • Mairie de Saint-Gildas de Rhuys & Association des amis de l'abbatiale
Abbatale Saint-Sauveur de Redon • Ville de Redon
Abbatale Saint-Melaine • Ville de Rennes

Partenaires
Médiathèques de Quimper Bretagne Occidentale
Lycée des métiers du bâtiment et de l'écoconstruction, Pleyben

Gant Kuzul rannvro Breizh ez eo skoazellet ar raktres « Ilizoù-abati romanek e Breizh ».

Lec'hiennoù a gemer perzh er raktres
Iliz-abati Sant Tudi • Kêr Loktudi & Kevredigezh Mignoned an ograoù
Iliz-abati Itron Varia Lokmaria • Kêr-Gemper
Iliz-abati ar Groaz Santel e Kemperle • Kêr Gemperle
Iliz-abati Lokentaz • Ti-kêr Lokentaz & Kevredigezh Mignoned an iliz-abati
Iliz-abati Sant-Salver Redon • Kêr Redon
Iliz-abati Sant-Melan • Kêr-Roazhon

Kevelerien
Mediaouegoù Kemper Breizh Izel
Lise micherioù ar sevel tiez hag an ekosavadur, Pleiben

